

# Eur zon savet deu amzer ar broment

(var er ton ar guaréhet)



LE BRETON

GERBET

## 1<sup>er</sup> Poz

Didostait oll tud va bro, me ho ped humblamant,  
Dazilaou cana eur zon gret gant eun ignorant,  
Non pas vit plijout d'an oll na ve bet hepe far  
Ma na voket guiseur zon hi vovel d'eun histoar.

## 2<sup>e</sup> Pez

Groët silanç d'am fréposiou, m'ar galan en ober  
Rac dré ma guinidiguez ne larin ket guevier  
Dré ma y oun eun den farçus ha noun ket studiet  
Mar teufen da n'em vankoert matreze vin exuset.

3<sup>e</sup> Poz

Pa fell d'in n'em occupi da reī divertissament  
Non pas vit ma facho den na beza drouc contant  
Evit levet eur rézon gret er guis d'eur badin  
Eur vintinvez araoc lein var lec, h'ar c'housk mintin

4<sup>e</sup> Poz

Er ton da gonsideri penos e ma chanchet  
An deguis hac ar c'honvers trézomp va mignonet  
O velet an dud dibrez pe an dud féneant  
Raon met trec'hal ha pourmen ha pochoc hoas archam

5<sup>e</sup> Poz

Har ar paour ques miserabl ar labourer douar  
Hon né bemde an tu da scarza e gontouar  
Contebution da bea hag alies cresquanç  
Dré ma ve ket er poejou egal bars ar balanç.

6<sup>e</sup> Poz

An traou deus ar plazou ze marc'had mad da verz  
Pez a fot vit e zervich zo goal guer da breno  
Goisquet eo a bep tu an tiez er labour  
Ar vecherourien zo oet quer me z'an d'en zicour.

7<sup>e</sup> Poz

Zel tout ar artisanet a guenét d'eus eur vicher  
An d'eus muioc'h a beievit eur labourer  
Caër en d'eus lakat poan da antreten e stal  
Ben pa tieu a bla an dro na ne quet da vragal.

8<sup>e</sup> Poz

Dreist pep tra eur merour a ranp pea fermou  
Rei lonet izel bris a force mat d'ho guérzo  
Donet er ra an eil rum a oa mad da ouanva  
Ma visé ma er c'honvers ne voa quet ret o foaret.

9<sup>e</sup> Poz

Notro ne ra man ebet a lip ato er zos  
Aen padeus gouel mikel na c'houlo quet gostos  
Rac ma na ve -quet peet d'indan er mis goude  
M'an prest d'ober mijo hep cavet tam true.

10<sup>e</sup> Poz

Lec'hober, a c'hontrol er refe courach ha ners  
Da consolo eur mérour quen vomad ar c'honvers  
Pazes guir lak er boan dre mill ha mil moyen  
Cass saout bepret dah foar vechou cafet quet perrieu.

11<sup>e</sup> Poz

Petra era neuze nemet pea custum  
Goude c'hoascol e amzer rostac dam butun  
Hep caouet tam na banach' ha dra sur nés faot  
Hep caouet, met espéranc de scarza er zacot.

12<sup>e</sup> Poz

Dreist pep tra ma deoret dézan pea servichouren  
Pé gris e ten da nem sével tresom ni merourien  
Comananchou dreist muzel e vet ret da rei de  
Ha c'hoas mac, hant en avanc n'ende ket hanter dioute.

13<sup>e</sup> Poz

Gand bugaligou en ty a ya ive mesmes tra  
Quemeni bars on dispign hac a fot de guisqua  
Ha hui potret ha merc'het pelech emao derrompag  
Me lar bars eù da varn et caont an nevaj.

14<sup>e</sup> Poz

Heno peus descadurez gout aret tud savand  
Discon a rer nem billat ha penos caout chican  
Ha c'hoas meur d'ar scoulac'h hac' aro exemplou  
Evit mont eon en hant a zoug dan dizurzou.

15<sup>e</sup> Poz

Memes tra na servich quet dihan couls hac ar re hal  
Nep na quet vo reputet pe laqueit un den fal  
Breman ne rer convers na marc' had bet a gren  
Hep caouet da lipet un tas pe ur veren.

16<sup>e</sup> Poz

An draze ne quet dizurs de nep var en usaj  
Me lar ema agreapl etre ar vignonay  
Ne zifennet quet mont na dont bars en hostaléri  
Met deuz a hini a eva da c'hoal res titui.

17<sup>e</sup> Poz

Na zifennet quet an evage gant mat hac honestis  
Mes deus a re touellet betec ar gourmandis  
Rac en evage so gret evit soulagi ar galon  
Da nep aoar nem regli gant modération.

18<sup>e</sup> Poz

Mes ar c'hontrol draze greit aliez  
Lot a ra dispignou sol evar o dienez  
Dienez de ohunan ha dar re al vechou  
Ve ret de ob r ces moan goude ar c'horvadou.

19<sup>e</sup> Poz

Mes c'houi ive hostijen evesaît deuz o cont  
Goud aret couls ha me dar bed al vo ret mont  
Pa vo tud re veo na ty discoet de hent ar guer  
Antronez he vo contant c'houi pogreit o tever.

20<sup>e</sup> Poz

Hen dal e moc'h oblig et da nim ziccur ive  
Rer a ret e donezon meur a vanach café  
Evit tena a profit an draze gavan mat  
Lot a reffe o squiant vit caout ur lipat.

21<sup>e</sup> Poz

Comanset meus bars est pen  
Ha échuet ba anter  
Traou oualh a meus laret doh  
Pénéoguir meusquet amzer.

22<sup>e</sup> Poz

Er bloavez naovarnuguen  
Ema rymet aeo er chanson  
Quemet bani glévo  
Arei réflexion.

LE BRETON J.-M.  
ZONNED CAATQUENVEN  
LE FAOUET